

Erru miz Ebrel ne veze ket peurdeñval ken an nozvezhioù. Daoust ma oa ar Sadorn e oa savet Kathrine abred. Dihuniñ a reas ar bugel, fardañ e zijuni dezhañ ha kas anezhañ d’e vamm-gozh. Mont a reas en-dro d’ar gêr, gwiskañ he skioù-bale, hag en hent. Betek ar savenn gentañ e heulias roudoù ar motoioù-erc’h, ha goude-se al linenn dredan a gase d’ar peul radio. A-benn ar fin, goude un eurvezh bennak, e tiroudas krenn diouzh al linenn ziwezhañ-se hag e kerzhas pelloc’h war-raok dre gwennded diharz ar fjell.

War-dro kreisteiz, kement ha diskuizhañ ha debriñ un dra bennak, e azezas war ur garreg hag a save diouzh an erc’h. Tremen a reas he dorn war al liken gell-oranjez, melen ha gwenn a c’holoe ar roc’h.

Goude-se, hag hi en hent dija, e savas un aezhenn dener, un doare latar, hag an oabl a gollas e liv glas hag ez eas war zislivañ. Anavezout a rae an hent avat, meur a wech e oa bet betek an tour-tan, setu ma kerzhas war-raok, nebaon d’en em goll, zoken pa voe aet an heol da guzh, ha ken mouchet ar sklêrijenn ma veze kemmesket pep tra.

Dimezet he doa Kathrine gant Helge, ha ganet ar bugel, ha torret he dimeziñ gant Helge. Bale a reas betek

an tour-tan, tremen an noz du-hont ha distreiñ d'ar gêr antronoz. He mamm a rae war-dro ar bugel neuze, ha war an deiz e-doug ar sizhun ivez, pa veze Kathrine o labourat e burevioù ar valtouterezh.

Goude he labour ez ae da di he mamm. Koaniañ a raent asambles o-zri, ha goude-se e kase Kathrine ar bugel war he brec'h d'ar gêr. Adalek an deiz ma teskas ar bugel bale e-unan ne voe ket ret dezhi dougen anezhañ ken. En hañv e oa. Neuze e krogas an devezhioù da verraat, ec'h erruas an diskaramzer, an erc'heier kentañ, ar goañv da c'houde.

Sizhunvezhioù 'oa e oa aet an heol diwar wel hag ar sklêrijenn da get. Noz du a oa war ar vro. Klozet e oa ar gêrig en deñvalijenn. Gouleier ar postoù-lamp a hañvale bevennoù ur bed kloc'h ma oa dibosupl d'an dud tec'hel kuit dioutañ. Daou-ugent kilometr alese e oa ar gêr dostañ, ha pevar-ugent da vont gant an hent a rede dre an ec'honder digenvez ha divuhez, etrezek kreiz ar vro da gentañ a-raok distreiñ war-zu an aod. Pa rae erc'h, pa ne baouez ket an erc'h da gouezhañ, e veze sparlet an hent. Neuze e veze klozet ivez an aerborzh bihan, a oa un tammig er-maez eus kêr war un uhelenn, ha ne zeue na garr-samm na garr-nij ebet ken, war-bouez bag an Hurtigruten, hag en em gave d'an abardaez war e hent d'ar c'hreisteiz, ha diwezhat d'an noz pa skoe war-zu Kirkenes, war harzoù Rusia.

Erc'h a rae alies, ha teñval ha yen e oa. Mervel a reas tad Kathrine ; un deiz, diouzh ar mintin, ne zihunas ket. Ne oa ket gwall gozh c'hoazh. Dont a reas ar pastor, ha chom a reas gant ar vamm er gegin. Ur banne kafe a aozas Kathrine, ha goude-se tapout krog e dorn ar bugel ha kas

anezhañ d'ar gêr. Chomet e oa ar pastor hag ar vamm ouzh taol, digomz.

D'ar Sul en doa komzet ar pastor diwar-benn froud ar vuhez, a ya betek mor ar Beurbadelezh. Neuze, kement boud bev a c'hello neuial el levenez eno, emezañ. Eno e vo pesked e-leizh. Rak kerkent hag en em gavet ar froud er mor e vo yac'haet an dour sall, ha kement tra a vevo e-lec'h ma redo.

Neuze e kuitaas ar bodad tud an iliz, ha mont d'ar vered en deñvalijenn hag en erc'h don. Pevar devezh-pad o doa ranket an toullerien-bezioù tommañ an douar a-benn kleuziañ ar bez.

Ar bloavezh-se e voe dale gant an nevezamzer. En diskaramzer e tapas Kathrine he femp bloaz warn-ugent. Evel bep bloaz e fardas ar vamm ur wastell eviti, ha mont a rejont holl asambles d'an ostaleri Evelkro d'ar Sadorn, ma voe kaset ur fest bras hag a lakaas an teodoù da vont en-dro pell war-lerc'h er gêrig vihan.

D'al Lun ez eas Kathrine da ensellet ar vag Verch-neuralsk. Tremenet e oa buan-tre er valtouterezh, ha skrivet he rentañ-kont a-raok bezañ kaset en hent gant he mestr. Rust e oa an amzer d'an deiz-se, uhel-tre an tonnoù-mor, ken uhel ha lein an tiez, ha bec'h gant ar bigi evit klask goudor ur porzhig. Tregont chaluter a oa distroet dija, lod anezho ha na oant ket da zont en-dro d'ar porzh a-raok eizhtez. Taolet en doa ar mestr faksoù servij diwall an aodoù d'ar blotoù, ha lavaret e vefe hiriv un devezh start, an holl a rankfe bezañ war api.

Er porzh e chome ar bigi, lod anezho ivez stag ouzh ar ponton war-neuiñ a oa bet savet gant ar Rused er-maez eus kêr. E pep lec'h er gêrig e pourmene strolladoù martoloded rus. Eno e vezent gwelet o straniñ hag o

klakenniñ, ha tud ar vro da cheñch tu pa dremenent hebiou dezho. En o sav e vezent gwelet dirak ar Rimi hag ar supermarc'had all, tolpet ouzh ar c'hiosk, pe o sellet lontek ouzh gwerenn-dal ar stal kompoderezh hag ouzh hini an elektronik-mor. War an hent d'ar porzh e chomas a-sav Kathrine evit kontrolliñ ur strollad Rused. Lod anezho a c'hoarveze dezho degas boutailhadoù vodka e seier plastik pe butun floderezh, ha gwerzhañ anezho er gêrig.

Diskarget e oa bet ar Verchneursk dija. Daoust ma ouie Kathrine n'he dije kavet netra, na vodka na vutun, ez ae bep gwech e-bourzh ar vag pa veze er porzh. Neuze e veze pedet gant Alexander, ar c'habiten, da zont e-barzh e damm gabinenn vihan, hag eñ diskenn an daol a oa staget ouzh ar sol gant daou grog. Azezañ a rae war ar gweleig, ha Kathrine war ar gador, hag e choment ur pennadig da flapiñ, daoust d'an diaes ma oa dezho en em gompren. Bep taol e veze kinniget ur banne vodka dezhi, ha bewech e nac'he evañ. Kaer he doa displegañ dezhañ e oa difennet dezhi degemer tra ebet digantañ, hennezh ne rae ken 'met c'hoarzhin, ha diskenn unan dezhi, ha chom a rae ar werennad divoulc'h war an daol. Neuze e farde Alexander ur banne kafe-poultr, ha kontañ eus e wreg, hag eus e ziv verc'h, Nina ha Jenia, eus Mourmansk, ha neuze e lavare e tlefe Kathrine dont da weladenniñ anezho hep dale. Ur gêr vray e oa, emezañ, hag e tiskoueze dezhi kartennoù-post. Ar sinema Atlantika, ar poull-neual, delwenn ramzel ur soudard, arouez difennerien takad polel an Unvaniezh soviedel e-kerzh ar Brezel Broadel bras. A-wechoù ez ae da gerc'hat e albom fotoioù hag e tiskoueze skeudennoù eus perzhier-mor bet darempredet gantañ, skeudennoù eus an inizi Shetland, ar Feroe, al

Lofoten, hag e c'houlenne digant Kathrine perak ne skampe ket kuit alese da vat.

— Yaouank out, emezañ, evel pa vije abeg a-walc'h dezhi da vont kuit, ha koant out.

Padal, ne rae-hi nemet c'hoarzhin.

Pellaat a reas an amzer fall war-zu ar Reter. E-tro kreisteiz e pigne dija an termometr en tu all da zero, ha kozh ha kaletaet e oa an erc'h. Bleinañ a reas Kathrine betek an tour-tan. Pell zo ne oa ket bet eno. Ne ouie ket piv a oa diouzh tro ar miz-se, met ne rae ket van, heñvel-mik e oa an holl warded tourioù-tan forzh penaos. Pesketaerien e oant bet holl a-raok, paotred yaouank kozh pe intañved anezho, paotred hag a bleustre o micher e-pad ugent vloaz hep morse seblantout koshaat, hag un deiz e varvent, evel pa ne vije c'hoarvezet tra. Ganto e veze dalc'het naet al lojeiz, hag ober a raent war-dro an ardivinkoù, ha sellet dre lunedoù hirwel bras ouzh ar mor, hag arsellet ouzh ar bigi a dremene hebiou. Plijet e vezent pa zeue Kathrine da weladenniñ anezho. Neuze e komzent e-pad pell, e tibunent istorioù eus un amzer wechall-gozh, diwar-benn tud marv pell 'oa pe aet kuit. Atav e kontent ar memes istorioù, ha marvailhat hep termal, hag int tud ken tavedek hag ar vro en-dro dezho koulskoude.

Mont a reas Kathrine en-dro d'ar gêrig dre ar vro erc'hek, divent ha digenvez, ha tremen hebiou fjordoù ha menezioù, dre gompezennoù ledan ha torgennoù izel. Heñvel e oa ar fjell ouzh un damskeudenn savet war ar prim, un nebeud linennoù oc'h ober anezhi. Amañ en norzh e oa heñvel-mik e pep lec'h, pe e vefe Rusia, Finland, Sveden pe Norvegia. Dindan erc'h e oa an

harzoù, kennasket e veze pep tra gant an erc'h, goloet pep tra gant an deñvalijenn. An harzoù gwir a oa da glask etre deiz ha noz, etre goañv hag hañv, etre an dud.

D'ur poent bennak e spurmantas Kathrine un tro-pelladig kirvi-erc'h. Bez' e oant holl tolpet asambles, troet o selloù war ar memes tu. An nevezamzer a oa anezhañ, berr ha sklaer e oa an nozvezhioù, ha padal ne zeufe ket an erc'h da deuziñ a-raok penn-kentañ an hañv, e-pad un nebeud mizioù nemetken.

Kathrine he doa dibriedet diouzh Helge peogwir e oa lonker ha feuls an den. Daoust ma n'en doa morse kredet lopañ ganti e tismegañse anezhañ, hag un deiz he doa skarzhet anezhañ 'maez, ha ne oa ket deuet Helge en-dro. Bemdez e wele anezhañ o treuziñ ar bourk gant e Harley pa zistroe eus al labouradeg pesked ma oa o labourat, ha mont betek al lochenn ma oa bremañ o chom enni gant un toullad labourerien all, ha mont-dont betek ar porzh hag en-dro, diehan. Neuze ez ae d'an Evelkro, ha mezviñ, ha tro hanternoz e kleve Kathrine trouz e varc'h-tan adarre, kreñv, ha goude o wanaat, betek mont diwar-glev.

A-wechoù ez ae Kathrine da welet ur vignonez, pe e teue mignonezed da welet anezhi, hag ar vugale a c'hoarie ken ma vezent skuizh, ha neuze e vezent kaset d'ar gêr gant o mammoù.

Seul goshoc'h ma teue an dud da vezañ, seul startoc'h e oa dezho gouzañv an deñvalijenn hag ar yenijenn. Setu ar pezh a lavare an holl, ha marteze e oa ar wirionez ganto. Ar re gozh ne lavarent netra, chom a raent didrouz er gêr, paret o selloù war an dremmwel, ha gortoz.

An dud az ae da weladenniñ o amezeien, peotramant e teuent int-i d'ober ur gwel dezho. Dibrenn e chome

atav dorioù an tiez, hag atav e veze gouloù o teviñ ouzh ar prenester. A di da di ez ae an dud gant o c'hirri. Kejañ a raent e oaled an dud a vor pe en Evelkro, ar pub. Evet e veze te pe kafe, ha kontet e veze istorioù an eil d'egile. Evet e veze bier, betek gellet kas an deñvalijenn diwar o speredoù.

Ar baotred ne fell ket dezho dimeziñ er goañv, eme an dud, rak an nozvezh eured a badje neuze tri miz. Alies e vez klevet ar bourd-se. Perak ne oa ket bet dimezet hennezh er goañv ? Abalamour ma pad tri miz an nozvezh-eured.

En hañv e timezer, hag er goañv e tizimezer, ha goude-se e tremener un nozvezh gant ur paotr all, unan hag a lakfe e boan. Nozvezhioù en ur gwele all, etre daouarn all, gant gerioù all, hag a dalveze koulskoude ar memes tra. Chom ur pennadig c'hoazh 'ta, deus dindan va c'holc'hed, yen eo. Tro da gein. Petra 'peus c'hoant da gaout ? N'ouzon ket. Chom mut.

Leinañ a rae Kathrine e oaled an dud a vor, asambles gant he c'henseurted eus ar valtouterezh. Eno e rae Svanhild war-dro ar gegin, hag eno e kouske a-wechoù kargidi Peskerezh Rusia, pe mekanikerien ha tud a vor, pa ranke ar bigi bezañ kempennet.

Da-geñver ur fest en Evelkro he doa graet Kathrine anaoudegezh gant Christian, un Danad hag a oa da chom er gêrig e-pad meur a viz evit sikour lakaat e plas ur sistem emgefre evit pouezañ ar pesked el labouradeg. Skeudenn vev an Danad e oa Christian evit Kathrine. Kement tra gantañ a oa sklaer, e zaoulagad, e vlev, e groc'hen. Daoust ma ne oa ket tev, bouk ha dispis e oa linennoù e zremm koulz hag e zaouarn. Ur vouezh flour en doa, hag un urzhiataer hezoug kennnasket d'an

internet. Mont a reas Kathrine da weladenniñ anezhañ ur wech bennak en e lojeiz war bevenn ar bourk. Diskouez a reas pajenn degemer lec'hienn e embregerezh dezhi, tra ma oa Kathrine o c'hedal e vefe poket dezhi ; padal, ne reas ket.

Mont a reas Christian kuit. Etretant e oa aet Kathrine war ar rouedad ivez, hag e-pad ur pennad e eskemmjont posteloù. A-wechoù e teue posteloù Christian eus broioù estren, ma oa aet di evit ober war-dro staliañ ardivinkoù all e labouradegoù pesked all. Da gentañ e konte dezhi pegen bamet e oa gant ar broioù-se, ha goude-se diwar-benn e labour tra ken, ha gwechoù all e teue ar posteloù eus Århus, ma oa o chom ha ma oa sez e embregerezh eno.

Kathrine a gontas da Alexander diwar-benn Christian. Morse ne oa bet Alexander e Århus, met klevet en doa lavaret e oa ur gêr vrav.

— Perak n'ez afes ket da welet anezhañ ur wech ? a c'houlennas.

C'hoarzhin a reas Kathrine.

— Emaout o c'hortoz re a-berzh an dud all. Te eo a zo e karg eus da vuhez-te, eme Alexander.

— Ha studiet 'peus psikologiezh ? a lavaras Kathrine. Komz a rez evel 'pije graet studioù war ar psikologiezh.

— *No problem*, eme Alexander, hag eñ lonkañ ar banne vodka en doa skuilhet evit Kathrine, ha lakaat an daol a-istribilh en-dro ouzh an daou grog er sol.

D'an abardaez e tizouaras ar Verchneursk en-dro, hag evit ar wech kentañ abaoe mizioù ez eas Kathrine d'ar pub. Kaset he doa ar bugel d'he mamm. Mont a reas da-heul ur paotr betek e di ha tremen a reas an nozvezh du-se. Mignoned e oant bet gwechall. Pemzektez war-

lerc'h e teuas ar Verchneursk en-dro, leun he strad a besked hag a skorn.

A-wechoù, pa veze fall-tre an amzer, e selaoue Kathrine ar meteo war ar radio. Nerzh an avel hag ar plasoù, Jan Mayen, Groenland, Svalbard, an Douar Nevez, ar Meridian orin. Neuze e soñje e Alexander hag en e vagad. Daoust ma anaveze mat ar vag he doa mizer he empennañ, un tu bennak du-hont, pell er mor, e-kreiz an deñvalijenn, pa strinke an tonnoù dreist ar pont, hag ar baotred da sachañ war ar rouedoù, hag ar mor o sevel hag o tiskenn diehan, noz ha deiz. Spi ganti e vefent holl dizañjer.

Neuze e teuas an diskaramzer hag ar goañv. Echuiñ a reas ar bloavezh, unan nevez a grogas. Tro an nevezamzer a voe.

Arc'hantek hag hinon e oa ar mintinvezh-se. Eus Mor Barents e c'hwezhe kreñv an avel, ha kurunennet e oa an tonnoù gant spouenn. Bremañ e laboure Christian e Portugal, ha diouzh ar pezh a skrive e oa e bleuñv ar gwez pechez eno, ha bemnoz e chome azezet er-maez, hag e konte pegen disheñvel e oa merc'hed Portugal diouzh re Danmark pe Norvegia. Skrivañ a reas Kathrine e oa e soñj dimeziñ en-dro, ha Christian a gasas e c'hourc'hemenoù dezhi. Ne ouie ket gwall vat Kathrine hag-eñ e oa aze peadra da laouenaat. Laouenaat a reas pa krogas d'ober glav diouzh noz evit ar wech kentañ ha pa ziskornas an hanter eus ar gwiskad erc'h.

Dimeziñ a reas Kathrine gant Thomas ; c'hwec'h miz kent he doa graet anaoudegezh gantañ. N'en doa ket c'hoant Thomas da vont d'ober ur veaj-eured, beajet en doa dija dre gement lec'h a oa. Kontañ a rae eus

Afrika. Afrika a oa e vro muiañ-karet, emezañ. Pa lavaras Kathrine ne oa morse aet en tu all d'ar c'helc'h arktikel e c'hoarzhaz hag e lavaras ne grede ket anezhi.

— Eo, re wir eo, emezi.

En hañv e voe harzet gant Kathrine hag he c'henseurted ur Rus hag en doa flodet dek mil kached ekstasy dre an harzoù. Harzet e voe ganto, pezh ne oa ket diaes d'ober. Mousc'hoarzhin a rae, ha ne baoueze ket d'en em zigareziñ evit ar bec'h a roe dezho. *No problem*, emezañ pa voe kaset gant ar vag da Vadsø, ma tremenas dirak al lez-varn ha ma voe toullbac'het. Pa voe lezet da vont e steuzias, ha morse ne voe gwelet er gêrig ken.

Kathrine a gomzas eus an degouezh-se gant Alexander. Kement floder a vo paket, deiz pe zeiz, emezi, hag un dra zañjerus eo plediñ gant kenwerzh an drogajoù. C'hoarzhin a reas Alexander ha gwilc'hat outi. Ober a reas-hi un hej d'he skoaz, ha lezel ar vodka e-lec'h ma oa bet servijet dezhi hag evañ he banne kafe. Abaoe tri miz ne oa ket bet paeet dezhañ e c'hopr, eme Alexander. Pa ginnigas arc'hant dezhañ e nac'has, ha profañ a reas dezhi un dorzhiq bara rus.

Ur wech, ma oa deuet en-dro ar goañv ha ma c'hwezhe spontus ur gorventenn, e chomas ar Verchneural'sk er porzh evit an noz. Bet e oa Kathrine da welet Alexander en endervezh. Un hanter penn-moru, lakaet gantañ en ur sac'h plastik gant skorn, en doa profet dezhi. D'an abardaez, pa oa o vont d'ar gêr, he doa gwelet Kathrine Alexander hag e baotred o vont d'ar pub. Savet he doa ar sac'h gant ar pesk d'an nec'h hag ober sin dezho. Ne voe ket gwelet gant ar baotred. Krial a reas adarre met gant ar gorventenn e voe lonket he c'homzoù.